



12

Emmanuelle Siohan

A-bouez eo stummañ ar re a vo kelennerien evit an dud deuet, dezho da vezañ efedusoc’h.



PRIZ AN DIORREN GLAS



A-bouez eo produiñ energiezh o toujañ muioc’h ouzh an natur, oc’h ober gant nerzh an heol, an dour... Met ha kemeret eo bet – hag e vo – e kont an holl zispignoù e-liamm gant an implij ?

4

BRO-EUSKADI

E skol-veur Bro-Euskadi (tri lec’h er gumuniezh emren, hag an hini pennañ e Leioa, ur bannlev a vBilbo) e c’hell an nen dibab da gas e studioù e yezh ar vro.

2

PROSEZ AR GLIFOZAT

D’ar Gwener 29 a viz Genver 2021 edo galvet 7 falc’her-ez eus bagad Tremargad e Kreiz Breizh dirak lez-varn Gwengamp evit bezañ bet livet podoù glifozat.

3

DINDAN AR MEMES TOENN

Abaoe 2 vloaz e oa Virginie Le Goazcoz oc’h injinañ ul lec’h bras da vodañ ennañ meur a zen, c’hoant ganto kenlabourat. Setu penaos eo ganet "La Machinerie".

11

BRESEREZH ARTIZANEL BREIZHAT ABAOE 1985

COREFF

DA HEULIAÑ
DA RANNAÑ

DAÑJERUS EVIT AR YEC’HED EO EVAÑ ALKOL, DA VEZEIÑ GANT FURNEZ

Klok an heuliad !

Diwar darvoudoù 1968 e oa deuet ul lañs nevez : imor ha kounnar ruz, a-enep dizurzhioù ar bed hag un temz-spered "anarkour" gant lod ivez. Goude 1981, e tiwanas ur groudigezh liesseurtoc’h, digor war ar bed ; buhez dre skrid, war gan pe war al leurennoù.

Lennegezh ar brezhoneg en XX^{vet} kantved
- Efed Mae 68
- 20 bloavezhiaid traoù mesket
- Levrenn 4 -
gant Francis FAVEREAU
Ul levr 480 pajennad.
www.skolvreizh.com

Bro-C'hall

AR RANNVRO BOURGOGN-FRANCHE-COMTE TONKET DA ZISPARTIÑ ?



Goude ar rannvro "Reter meur" zo bec'h àr ar rannvro " Bourgogn - Franche Comte" ! Lañset eh eus bet ur petision àr internet evit adsevel ar rannvro Franche-Comte kar en em santout a ra Frañkonted zo marjinalizet gant ar rannvro nevez ha pouez Dijon. Ha n'eo ket ar ministr-kentañ a yay a-enep dezhe !



Dijon

Ar rannvro Bourgogn-Franche Comte a zo bet savet e 2016 diàr teuziñ div broviñs istorel ; ar Bourgogn hag ar Franche-Comte. Padal, 5 bloaz àr-lerc'h, zo kaoz a derriñ an eured. Da gentañ holl eh eus bet dispignet forzh argant evit an eured hag an adeured : 200 milion a euroioù etre 2015 (teuzet eo bet da vat d'ar c'hentañ a viz Genver 2016) ha 2018. A-benn ar fin n'eo ket bet arboellet gant ar rannvro nevez evel ma oa bet embannet àr ar groaz a-raok.

hervez an emsavourion Frañkoñtad. Ent-ofisiel eo bet lakaet Dijon da gêrbenn velestradurel ha Besançon da gêrbenn bolitikel ha padal n'emañ ket ar Breujoù e Besançon. Anez komz ag an dileuridi : 100 dileuriad rannvro en holl, 59 bourgognad en o zouesk ha 41 frañkoñtad nemetken. Ha trouz e Franche-Comte anat.

bet 1442 gwech d'an eur ma skriver ar pennad-mañ. Ha n'eo ket emrenourion an Emsav Franche-Comte peotramant Jean-Philippe Allenbach, ar skrivagnour hag emsavour e penn an Emsav Frañkoñtad ha bet prezidant ar Strollad Kevrealour, anavezet e Breizh, a zo o kas an traoù aze. Tud dianav hervez ur pennad embannet àr L'Est Républicain met mennet gant o identelezh hag o rannvro.

a zegasas dour da brad an emsavourion frañkoñtat o lavaret, d'an 23 a viz Genver e Colmar, "Biskoazh n'on bet kendrec'het gant ar rannvroioù divent" bet treset àr korn an daol evel ma ouit (ha n'eo ket ur vojenn eo !) Hag eñ da ouzhpennañ : "An identelezh lec'hel... Sed ar pezh a gendalc'h, a dolp, a ro merkoù. Se zo kaoz e tleer kaout doujañs outi. Se zo kaoz e vehe pec'hed d'o c'hroaziñ en un tenn".

European a Elzas gant ar gouarnamant. Perak ne vehe ket graet ar memes tra e Franche-Comte ?

Evit fed ar strolladoù politikel, emañ LR hag an RN a-du gant adsavidigezh ar rannvro, tra m'emañ kentoc'h ar sokialourion laouen gant an traoù evel m'emaint. Arabat ankounac'haat eo François Rebsamen maer Dijon ha bet ezel ag ar gouarnamantoù Valls 1 ha 2 pa oa Hollande en Elysée...

Fabien Lécuyer

¹<http://chnng.it/sdjLpPvkMg>
²@regionfranchecomte

Kevezerezh an div gêrbenn

Ouzhpenn-se e chom kevezerezh etre an div gêrbenn, Dijon ha Besançon. Da lavaret gwir, Dijon a zo o kreskiñ diàr-goust Besançon

Klemm tud dianav

Se zo kaoz eo bet lañset ar petision "Faisons renaître la Franche-Comté"¹ àr internet, hag ar strollad "Région Franche-Comté" àr ar rouedadoù sokial². Sinet eo

Castex a-enep ar rannvroioù toull

Kar an identelezh eo a zo e kreiz ar jeu. Ha Jean Castex

N'emañ ket pell ar Franche-Comte ag an Elzas àr ar marc'had. Ha gwelet o deus Frañkontiz penaos eo bet savet ar Gumuniezh

Bro-Euskadi

STUDIAL AR VEZEGIEZH EN EUSKAREG



E Bro-Euskadi e c'hell ar re yaouank ag an Iparralde studial ar vezegiezh en euskareg e skol-veur Bro-Euskadi, 'kosteaz Bilbo. Skañvoc'h eo ar c'hoñdisionoù hag ar paperachoù e-keñver ar pezh a oa gwechall. Met estroc'h evit ar vezegiezh, micherioù an degemer... a c'hell Euskariz an norzh studial en euskareg e Donibane Garazi (Saint-Jean-Pied-de-Port) ivez.

Bout m'eo bet troet an holl c'herioù (a-drugarez da c'hGuy Etienne-Abanna !) e yezh Roparz Hemon, n'eus ket moaien da studial ar vezegiezh e brezhoneg evit poent. Padal, e Bro-Gatalonia e vez oberataet an dud e katalaneg dibaoc'h pell. Troet eo bet geriaoueg ar vezegiezh e katalaneg, evel-just, kar... tost hañval eo ouzh hini ar spagnoleg ! En euskareg avat, n'eo ket memes kont c'hoazh

met, muioc'h-mui, eh eus medisinourion hag a ra gant an euskareg en o micher. Kar, gouzout a ra Yann vedisinour lavaret pep tra en euskareg ha studiet e vez ar vezegiezh en euskareg ivez !

E skol-veur Bro-Euskadi (tri lec'h er gumuniezh emren, hag an hini pennañ e Leioa, ur bannlev a vBilbo) e c'hell an nen dibab da gas e studioù e yezh ar vro.

Aesoc'h evit studiourion an Norzh

"Sed ar pezh a zo bet graet gant Kepa Garat" a c'hell an nen lenn àr Mediabask en ur pennad nevez embannet. Lisead e oa ar paotr yaouank er lise Bernat Etxepare, da lavaret eo ar lise en euskareg dre soubidigezh a vBaiona, ha choazet zo bet gantañ studial ar vezegiezh e Leioa ar bloaz-mañ. Betek-henn ne oa ket aes kas ar studioù da benn er Su evit ur studiour ag Iparralde e gwirionez, met cheñchet eo bet ar c'hoñdisionoù 15 vloaz zo ha bremañ eo aesoc'h an traoù evit tud an Norzh.

Nebeutoc'h a gevezerezh

N'eus tamm kenstrivadeg ebet evit lakaat e anv e skol-veur Bro-Euskadi, ar pezh a sach studiourion an Norzh, anat. Hervez Kepa Garat eo seurt mont-en-dro un dra vat ha reizh : "Ma labourer mat hag emañ a-us d'ar geidenn eo kadarnaet an danvez. Er c'hontrol, er stad c'hall, m'ho peus 5/10 hag un den all 9/10, setu c'hwil skarzhet. Muioc'h a gevezerezh a zo".

Studial micherioù an degemer en euskareg

Estroc'h evit ar vezegiezh a c'hell Euskariz studial en euskareg goude ar bak, avat. E Donibane Garazi (Saint-Jean-Pied-de-Port) eh eus ur lise micherel. Ar lise Frantsesenia an hini eo. Ennañ e vez studiet "micherioù an degemer". En douristelezh e c'hell labourat ar re ziplotmet met ivez er letierezh, er servijoù sokial, er servijoù yec'hed, er strollegezhioù lec'hel, er sevenadur peotramant en

embregerezhioù. E-kerzh o studioù e vo desket ar saozneg hag ar spagnoleg gant ar liseidi met ivez an euskareg. Hag emañ ar renerez e soñj kinnig d'ar re yaouank ur c'hursus divyezhek euskareg-galleg a-barzh nemeur. Un dalvoudegezh ouzhpenn eo gouzout an euskareg àr ur CV er c'hontrol, evit labourat gant tud ar vro met ivez evit labourat gant tud ar Su. Ha forzh penaos eo an euskareg ur yezh vev ken ez eo bev e-barzh ar lise c'hoazh* dre m'eo euskaldun an div drederenn hag ar re a labour ennañ.

'Pezh n'eo ket souezhus e Nafarroa behera (Navare-lzel) ma c'hell an nen preniñ ur pakad granola er Liddle peotramant ur varaenn e forzh peseurt bouloñjerezh, en euskareg. Forzh pe oad e vehe ar paotr pe ar plac'h er c'hef !

Fabien Lécuyer

*Skrivet eo e rann an "talvoudoù desavadurel" zoken àr ar lec'hienn internet : "hemen euskaraz mintzo gira" (amañ e vez komzet euskareg)



Torre Iberdrola y Paraninfo eus UPV-EHU (Bilbao)

Berr-ha-berr

Dour, douar, daeroù...

Dour forzh pegement er stêrioù, e Kemperle, e pep lec'h e Breizh. Dre voneur oa bet lakaet faselioù, ed, ha traoù a zalc'he un tamm an douar war ar parkeier. Met perak kenderc'hel da lakaat goudroñs war ar parklec'hioù ? Dre ma vez difennet bremañ da vont e kreizennoù kenwerzh ramzel, ne vefe ket poent da nullañ an holl raktresoù a lak an douar da redek re vuan ? Ha furnez a vefe un devezh bennak e penn an dilennidi ?

Douar a vez gouestlet d'ar maiz abaoe muioc'h eget 50 vloaz e Breizh, ha loened toullbac'het e savadurioù. Raktresoù diniver aotret gant ar prefeti hag ar Rannvro. Ha savet an hu war ar gazetennieren a glask ober o labour evel Inès Leraud pe Morgan Large eus RKB. Ha perak ne vefe ket kelaouet an dud e vez staliet e Breizh, war 6% eus douar Bro-C'hall, 50% deus ar chatal, ar yer, ar moc'h ? Perak ne c'hellfe ket an dud gouzout ? Mezhus eo gwelout penaos oa bet gwallgaset an div blac'h, lazhet ur c'hi, torret div wech dor ar radio...

Daeroù evit ar re o kuitaat ar bed-mañ, mut. Ne vo ket klevet ken mouezh Jean Do Robin gant e skipailh kanha-diskan, pa oa bet savet "Gavotenn ar repuidi". Ne vo ket difennet Palestina gantañ... Daeroù puilh a ya da heul an douar a ruilh war an douar e Breizh. Pegen trist eo fin ar goañv...

Daeroù levenez
Gant Joe Biden zo bet dibabet paouez gant ar chase graet d'ar repuidi. Ne vo ket mui dispartiet ar familhoù o tont eus Mec'hiko. Ha degemeret e vo anezho en un doare reizh. Unnek milion a dud dibaper a zo e Stadoù-Unanet. Diaes e vo, moarvat, gant tud ar Senat, met sinet oa bet gantañ tri dekred evit lakaat e plas ur sistem denel. Alejandro Mayorkas a vo e-karg, ur mab a repuidi Kuba, deuet babig da Amerika, al latino kentañ e-karg eus Ministrerezh a ra war-dro ar repuidi hag ar polis war an harzoù. Gant ma vo heuliet gant Europa...

FC

PROSEZ AR GLIFOZAT E GWENGAMP




D'ar Gwener 29 a viz Genver 2021, edo galvet, evit an eil tro, 7 falc'her-ez eus bagad Tremargad e Kreiz Breizh, dirak lez-varn Gwengamp evit bezañ bet livet podoù glifoizat e 3 stal-gwerzhañ louzeier a seurt-se tro-dro da Wengamp e 2016.

E 2015 e oa bet divizet gant ar falc'herien-ezed livañ podoù Round-Up er stalioù-gwerzh evit ma vefe prosez. E 2017, pa 'z eus bet prosez e oa bet asantet sevel goulennoù a-raok barn ouzh lez-varn Europa gant ar barner. Respont Bruxelles a zo en emgavet e miz Du 2020 : "an doareoù" da reiñ aotre da lakaat war ar marc'had seurt louzeier a zo dereat, met ne vez ket doujet atav ouzh an doareoù-se gant an embregerezhioù bras.

Molekulennoù difennet

A-raok bezañ barnet da vat eta, 5 bloaz war-lerc'h, zo aet 7 falc'her-ez Tremargad betek Menez Are d'an 9 a viz Genver, da droc'hañ pep hini ur guchennad blev hag a zo bet dielfennet gant al labourva Toxseek. E blev 5 anezho zo bet kavet molekulennoù difennet o



© MarcelDeLaGare

implij, louzeier implijet gant al labour douar greantel a-enep d'an amprevaned ha d'ar c'hebell-touseg ha difennet o implij evit lod anezho abaoe 1994 !
Ar brokulorez, goude he breutadenn – dizamant met heverk... – a 20 munutenn-

pad evit dichoual foñs ar gudenn ha dispenn ar "stad a redi" a lavare an dorfedourien bezañ dalc'het ganti, a echuas en ul lenn ur pennad bet savet gant Lanza Del Vasto a zivar-benn efedusted ar stourmoù nann-feuls !
Ar pezh n'en deus ket miret

outi da c'houlenn 1000€ a daol-gastiz evit pep hini (gant 900€ a goursez !). D'an 2 a viz Ebrel e roio ar barner e zisentez.

JK

*Peadra da adlañsañ eta un tolpad "Toxseek kuzh" gant PIG Bzh war <https://plog.bzh>

BERZH KENSTRIVADEG TAOL-KURUN

1318 Haiku a zo bet resevet ar bloaz-mañ. Brasoc'h-brasañ eo berzh ar genstrivadeg.

"trezek ar mor" a oa an tem dibabet evit ar 21^{vet} kenstrivadeg, bet kroget gant Hopala, goude gant ar festival Taol Kurun, ha bremañ gant ar gevredigezh Féa. Er bed a-bezh e ra berzh. Ingal e vez trec'h tud Roumania met resevet e vez ivez haiku a Gebeg, Aljeria, Alamagn, Suis, ...

26 stal haiku a zo bet graet er skolioù – gant 7 e brezhoneg, Banaleg, Kemperle, Tremeven... – hag en galleg (lise, skolaj, skolioù), a-drugarez da dTi ar Vro bro Kemperle ha Kuzul Rannvro Breizh. En holl zo bet 974 barzhoneg e galleg, 291 e brezhoneg, ha 38 e gallaoueg nemetken abalamour d'an opson a zo bet nullet evit ar bak. Nec'hus ken ha ken eo.

Disoc'hoù

E teatr Kerbertrand Kemperle eo bet roet ar prizioù, dirak 50 skolajiad ha lisead, hag a-raok e oa bet aozet un eskemm gant ar barzh Yvon le Men, Goncourt barzhoniezh 2019,

ha lennadennoù graet gant ar re yaouank. Plijus ken ha ken e oa, hag un doare evit nann-vrezhonegerien da selaou teir yezh Breizh !

Hag ar bloaz da zont, emit-hu ? Kenstrivadeg pe pas ? N'eo ket sur, kar kalz labour a-youl-vat a zo evit aozañ ur genstrivadeg ! Ha goude 20 vloaz, gant ur skor n'eo ket bet tizhet biskoazh, marteze eo un doare, gant al levr nevez flamm embannet gant Keit Vimp Bev, 366 haiku, da guitaat ar raktres-mañ evit ijinañ un doare all da blantañ barzhoniezh e buhez boutin an dud ?

FC

Barzhonegoù war al lec'hienn taolkurun.free.fr, haiku-où ar bloaz-mañ, met ivez ar re zo bet e konkourioù all



Loreidi 2021

Ar mintinvezh du
kregin er mor teñval
ar mor yen ha trist
Soazig, Skol Diwan Kemperle

Ma zreid er mor
evit ar wech diwezhañ -
adkroget ar skol
Donovan, klas divyezhek Tremeven

Dirak ar Mor du
n'ouzon ket petra ober
bugel ebet o c'hoari
Lou, skol Diwan Banaleg

Evit ar grennarded, feal
eo skolaj Henri Wallon ha
Skolaj Plijidi, gant Myriam
Guillevic ha Gwenola Coic,
deuet da vout ampart e
arz an haiku !

Divroad kollet
o vont gant red an dour
sklas
Nedeleg laouen
Apolline, 5^{vet} gwenn, Plijidi

Ar mor sklaer ha glas
ar vaout o heuliañ he hent
treset gant plastik
Alwena, 5^{vet} gwenn, Plijidi

Nijadenn ar ouelan
sonerezh dous an avel
a-us an traezh flour
Tidiane, 5^{vet} Henri Wallon,
Lannarstêr

Hag evit echuiñ evit ar
brezhoneg, trec'h oa
bet daou zen nevez,
gourc'hemennoù dezhe, ha
Loig Kampion, bet trec'h
dija !

Gourc'hemennoù da Mona
Mazet Baudé, tapet ar priz
kentañ ganti !

Pa freg ar wagenn
bili an aod a ruilh-diruilh
'vel perlez en noz sioul
Mona Mazet Baudé

Mor kalm-chok
war divaskell ar vorvran
dour ha gouloù
André Bonnard, Merlevenez

Lanv er porzh kozh
rouz noz en dremmwel a
luf
ba ma gwerenn bier
Loig Kampion, Naoned

TU TEÑVAL AR GREEN DEAL

Daoust hag-eñ eo ken burzhudus-se an Emglev glas evit Europa ? Daoust ha ne vefe ket un touell ober fae war saotradurioù stag ouzh ar c'henderc'hañ kement hag ouzh an adaozañ evit purchas danvezioù rouez hollret da c'hreanterezhioù an dazont ?

Broudet eo gant pennoù Bro-C'hall evel gant re Europa, gortozet gant ar geodedourien ha lidet gant ar c'hreantourien ; komz a reer diwar e benn evel ma vije un treuzkemm doare energiezh, ul lusk-stroll war-zu ur bed "digarbonateket", pizh war ar gremm kondon ha doujus ouzh an endro. Hervez ar Green Deal, an Emglev Glas, kinniget e 2019 gant prezidantez ar C'hengor Europat Usurla von der Leyen, ne vo ket gazoù efed ti-gwer ken adalek 2050. Bro-Sina a zo o paouez embann he neptuegezh karbonek evit 2060. Er Stadoù-Unanet ivez ez eus bet embannet gant stadoù pe meurgêrioù 'zo (Sant Fransisko, Los Angeles, Phoenix, New-York) ez implijint nebeutoc'h-nebeutañ a c'haz karbonek.

Met daoust hag-eñ eo ken glas ha ma kreder ar gremmoù ekologiek ? N'eo ket gwall sur. Meuleudi a glever kanañ diwar-benn un dazont glas, harpet war teknologiezhioù glas an digarbonateket : tredan diwar an aerluzañ, ar fotovoltageg met ivez diwar an nukleel ; kirri-tredan, tiez meret gant an domoteg, an niverel pe an dizanvezel...

Gwir eo ne vez saotradur ebet gant an teknologiezhioù glas-mañ keit ha ma vezer oc'h implijout anezho. Gwerzhet e vezont evit o ferzhioù mat. Met ne glasker ket gouzout penaos emañ kont en argrec'h d'o froduiñ, pe en ardraoñ, ur wech ma vezont adaozet (pe get). Yann ar Bobo, gantañ e garr-dredan (batirioù ha keflusker tredan ennañ), a vefe mat dezhañ en em soñjal diwar-benn ar vugale a zo o tastum kailh evitañ e mengleuzioù kobalt ar C'hongo-Kinshara.

Metaloù rouez

Evit teknologiezhioù nevez liesseurt e vo ret kaout muioc'h-muiañ a vetaloù klasel met ivez un daou-ugent bennak a vetaloù rouez (houarnek, amhouarnek, alkalinek, douaroù prin...). Implijet e vezont er batirioù, en daspugnerioù, en aerdredanerioù, er podoù

heoldredanel kement hag er medisinerezh, e teknologiezhioù ar c'hehentiñ... Ar poellgomzerioù a implijer a vez fardet gant metaloù rouez priziet-kaer, unan anezho evit e berzhioù magnetek, an neodim.

Rannet e vez ar metaloù rouez diouzh an douaroù ken rouez all (lod skañv, lod all ponner diouzh ar c'hementad atomoù a zo e pep hini anezho). Ar metaloù rouez a zo 22 anezho, tra m'ez eus 18 douar prin dezho un arver teknologel, e greanterezh an tredan dreist-holl (medisinerezh nukleel, loarelloù, tourioù-tredan, kefluskerioù ar c'hirri tredan).

Nevezket kavet-seurt metaloù ledet amañ hag ahont, met e-touesk kailh a bep seurt. Dav eo eztennañ, puraat tonennadoù kailh : o malañ, o silañ, o devañ e formioù, o devañ dre drenkennoù... Evit eztennañ ur c'hilogrammad lutesiom e tleer tennañ 1200 tonenn kailh diouzh ar

Anv	Bro ha % eus ar marc'had bedel	Implij teknologel
Kobalt	Kongo-Kinshasa 59 %	Poellgomzerioù, urzhiataerioù, gwarelloù
Litiom	Chili 44 % Aostralia	Batirioù, daspugnerioù
Niobiom	Brazil 92 %	Kirri-tredan, loarelloù
Rodiom	Afrika ar Su 80 %	Bravigerezh
Ruteniom	Afrika ar Su 93 %	
Antimoan, Stibiom	Sina 74 %	Treloc'herezh, danvez-ouzhpenn kalediñ
Tungsten	Sina 69 %	Binvioù gourresis, hobregonoù, tredanouriezh
Tantalom	Kongo-Kinshasa 33 %	Dougelloù
Paladiom	Rusia	Bravigerezh
Bismut	Sina 80 %	Ganeroù gwreztredan, dreistreell(où)
Galliom	Sina 80 %	Amherenoù, diodoù
Germaniom	Sina 80 %	Fotovoltageg, gwienn optikel
Indiom	Sina 48 %	Krugoù elektronek
Grafit naturel	Sina 69 %	Kirri tredan, gremm nukleel
Magneziom	Sina 89 %	Kendeuzadoù aluminiom

Un toullad metaloù prin hag al lec'hioù ma teuont ar muiañ diouto er bed

vengleuz, hag a vo dilezet war blas da c'houde. Er C'hongo, bro ar c'hobalt, e vez digoret mengleuzioù a "c'hopper" enno bugale karget da zastum kailh... N'ez eus mengleuz glas ebet ! 29 eus ar metaloù prin a vez kavet e Bro-Sina, 6 anezho e Afrika ar Su, 3 e Kongo hag ar peurrest, 9 anezho, e lec'hioù all eus ar bed.

Ma c'harr-tan tredan

Daoust hag-eñ e vefe eus ar c'hirri-tredan glas, dilaoskadenn CO² ebet ganto ("zéro émission CO²"), ur

Anv	Bro ha % eus ar marc'had bedel	Implij teknologel
Neodim	Sina 86 %	Gwarelloù, laser
Prometiom		Kompozadoù treluc'hus
Samariom	Sina 86 %	kefluskerioù-tredan, gwarelloù misiloù
Lantanom	Sina 86 %	Ferennoù, kompozadoù eus dreistreelloù
Europiom	Sina 86 %	Reaktorioù nukleel, douarwrez, goulaouerezh
Terbiom	Sina 86 %	Gwarelloù-pad
Disprosiom	Sina 86 %	Keflusker hiron, gwarelloù
Holmiom		Laseroù, kendeuzadoù dreistrellek
Lutesiom	Sina	Skingerioù a skinadoù Beta
Yttriom	Sina 86 %	Podoù nukleel, gwarelloù, kendeuzadoù dreistrellek
Erbium	Sina 86 %	Mezegiezh nukleel, optik

Douaroù rouez, un toullad oute

gounid nevez, disaotr, hep an disterañ elfenn a c'haz karbonek diwarnañ ken ? Dav eo kargañ hag adkargañ an daspugnerioù gant tredan o tont eus kreizennoù nukleel, eus an aerluzañ... pe c'hoazh eus kreizennoù glaou (dreist-holl e Sina met ivez er Stadoù-Unanet pe en Europa). E Bro-C'hall e tlefe seurt kirri-tredan lakaat an aezhennoù karbonek CO² da ziskenn eus 80%

re bell ganti : gwrezverkoù keit o vont war-grec'h, teuz ar skornredennoù, kresk live ar morioù, anadennoù hinel, diblasañ poblañsoù...

Gwelet e vo goude. Da c'hortoz e vo lakaet warwel an teknologiezhioù glas, ar meskad tredan ("mix" e saozneg) : aerluzañ war an douar pe er mor, fotovoltageg, metanaat, koad, dourdredan e lec'hioù zo. Hervez ar

c'houzout penaos e vez graet e Sina da skouer... N'eo ket bet ankouaeet an enklaskoù graet e Kreiz Breizh (Uhel pe Izel) gant ar stal Varistan (kaset gant ar stad c'hall) : klask ha renabliñ metaloù rouez 'zo.

Anv a zo eus ekonomiezh-kelc'h(ekonomiezh kendoniet, sturiadet, steuñvek a oa dija !!), eus dastum dilhad kozh, boutailhoù plastik, paper, houarnoù 'zo... Met n'ez eus ket eus greanterezh an adimplij da vat, n'ez eus doare ebet da adaozañ da vat evit poent... pe e vefe an dilerc'hioù nukleel pe an amiant, ar plastikoù, ar pneuioù, ar metaloù prin. N'eo ket loc'het da vat an adaozañ gant ar Green Deal.

An treuzkemm doare energiezh a zo en arvar da vezañ kalz stegnetoc'h eget na soñjer. Kalz a vez kavet, met al lamm teknologel nevez-mañ a red an dud d'ober ul lamm nevez a-fed emskiant ivez... Ha dont a reod a-benn ?

FLB

Aerluzañ : éolien
Amherenoù : semi-conducteurs
Anadennoù hinel : phénomènes climatiques
Danvez-ouzhpenn kalediñ : additif durcissant
Daspugnerioù : accumulateurs
Dilaoskadenn CO² ebet : Zéro émission CO²
Dizanvezelañ : dématérialisation
Douar prin : terre rare
Dougell(où) : condensateurs
Dreistreell : supraconducteur
Ekonomiezh kelc'h : économie circulaire
Ekonomiezh kendoniet : économie concertée
Emglev glas evit Europa : Pacte vert pour l'Europe / European Green Deal
Ganeroù gwreztredan : générateurs thermoélectriques
Gazoù efed ti-gwer : gaz à effet de serre
Gwarell(où) : aimant(s)
Kompozadoù treluc'hus : composés luminescents
Krugoù elektronek : puces électroniques
Skornredenn(où) : glacier
Treuzkemm doare energiezh : la transition énergétique

TUD KEMPER A-ENEP AMAZON

D'ar sadorn 30 a viz Genver e Kemper zo bet dalc'het ur vanifestadeg a-enep donedigezh Amazon e Brieg Bez'ez eus bet manifestadegoù all e Bro-C'hall, da skwer e-kichen Pont ar Gard. Divizet oa bet gant tud eus ar strollad stopamazonbriec e vefe kroget gant an abadenn e brezhoneg.



Ne oa nemet ur c'hant bennak a vaniferien dindan ar glav. Diskouezet zo bet er c'homz kentañ, e brezhoneg, penaos eo an embregerezh Amazon, pell diouzh ur wir demokratelezh, erruet dre guzh e Bro-C'hall da vare an dilennadegoù evit ar c'huzulioù-ker. "Démasqué, Amazon lance son opération séduction", a c'heller lenn diwar-benn un embregerezh hag a oar penaos en em staliañ aesoc'h eget ar genwerzhourien all ha paeañ an nebeutañ posupl a dailhoù e Bro-C'hall.

Implijoù krouet

Lavaret eo bet goude-se eo gwir e vo krouet 100 implij e stal Brieg met kemennadenn an 250 implij all evit kas ar marc'hadourezh d'ar brenerien a vefe gaou, peogwir eo graet al labour-se dija gant embregerezhioù all, ar Post da skwer. Treuskaset e vefe an implijoù nemetken. Hep komz eus an implijoù distrujet er c'henwerzh a-dost ha kêrioù o tont da vezañ gouelec'hioù.

Ekologiezh

Anv a zo bet eus an ekologiezh, evel-just. Goloet e vefe stal

Brieg gant panneloù-heol, ar pezh a zo ekologel met ne oar ket Amazon ober hep ar c'hirri-nij evit kas marc'hadourezh produet en Azia betek ar brenourien, hag int o chom e broioù Europa pe Amerika, ar pezh a daol kalz a CO² tro-dro d'ar blanedenn.

Goude ar c'homzoù-se e brezhoneg, eo deuet Baptiste Larvol-Simon, ijinour war an urzhiataerezh, ezel eus Solidaires Informatique, da lavaret e soñj. Hervezañ eo posupl d'un embregerezh evel Amazon govelliañ ar c'hoantoù ha distrujañ ar frankizioù. Degaset en deus an den yaouank-se da goun ar vaniferien penaos eo bet gounezet ar stourm a-enep ar greizenn nukleel e Plogoñv.

Katell Malbranque, kuzulierker e Brieg, he deus lavaret e teufe heuliadoù fall, abred pe ziwezhat, gant donedigezh Amazon er vro. Ne wel ket betek pelec'h ez aio ar stourm etre an embregerezhioù-se, c'hoant ganto bezañ krenvoc'h-kreñvañ, hep kalz a zoujañs evit an natur. Deuet e oa ivez Eric Piolle, maer Grenoble, erruet e Breizh da reiñ harp d'an ekologisted. Tro en doa bet da dremen un tammig a-raok e-kichen ur stal Amazon, en Essonne, e su Pariz. Hag aze en eus gwelet penaos ne oa ket aes labourat evit Amazon : blenerien kirri-samm o c'hortoz e vefe digoret ar stal evito, oc'h en en dommañ gant keflusker ar c'harr-samm.

Lavaret e oa bet e oa posupl da bep hini dont da gemer ar mikro evit lavarout e soñj diwar-benn donenigezh Amazon e Brieg. Gwelet hon eus e chom bev an demokratelezh.

Ur vanifestadeg all a vo, e Brieg, d'ar sul 21/2.

HLR

LAKAIT EKONOMIEZH! AR VRO DA DREIÑ!



470 embregerezh
war gement micher zo

110 000 a c'hopridi

www.produitenbretagne.bzh



www.image-de-marque.fr



Lenn, sellet ha selaou gant TES


EÑVORENNOÙ GUILLAUME LASBLEIS, BET DIWALLER TOUR-TAN ^{2/2}

Mont da c'hardian

[...] Da gentañ e vez lavaret : un den a ya en un tour-tan a rank goût ober pep tra. Setu e veze desket deomp : ajustage, chaudronnerie, menuiserie, par exemple, ma oa drailhet ar prenestr, beñ, ni a ranke goût penaos renkañ endro. Setu e ranker (goût) un tammig tout. Goude : polevat, bolo giz ma vez lavaret ivez, gant ur c'hanod... tout micherioù ar mor a ranker goût. Dija pa oamp auxiliaires hon oa desket gant an dud a oa titulaires... hon oa desket penaos ober tro-war-dro an tan. Ni, pa oamp komañset e oa tout tourioù-petrol, tout gant gaz de pétrole. Setu an dra-se, evidomp-ni, ne oa sekred ebet.

Mont da dour ar Maen

A-wechoù ne oa ket eus an aesañ da vont. Alies e vezer glebiet. Boñ an den glebiet ne oa ket re zañjerus peogwir e c'heller delc'her mat met ar gwashañ ma voe eo pa base ar sac'h ravitailhamant dre an dour : ar bara gleb, an dilhad evit cheñch gleb, ha c'hwî a-wechoù, pa 'yaer da vont, gleb ivez. Aze en tourioù pa veze brumachenn... beñ, sec'hañ an dilhad goude 'veze diaes, parce que dour dous ne oa ket leun-leun, setu, boñ, un tammig e veze paseet en dilhad en dour dous ha lakaat da sec'hañ goude pa vez ar moterien-brum er roud, a vez lakaet ar moterien er roud evit sec'hañ an dilhad. Ya parce que er goañv, an dilhad goude a chome humid tout. An dra-se 'oa an diaesañ 'vat.




Pennad tennet eus Tan, tan, tan... Tourioù-tan e Breizh, war lec'hienn TES (Ti-Embann ar Skolioù) - tes@ac-rennes.fr - 02 56 44 01 41 - www.tes.bzh

UN DEN ZO MARVET

GANT KRIS HAG ÉTIENNE DAVODEAU
© NADOZ-VOR EMBANNADURIOÙ, 2020



... AR MOGERIOÙ-DIFENN HAG ALL...



TRI BLOAZ 'E EUS BET EZHOUM EVIT DISKAR AN DISMANTROÙ HA KROUIÑ AR BLADENN A VEZO SAVET AR GÉR NEVEZ WARNI AMAÑ...



MAT... AR GÉR NEVEZ A ZELEFE KAOUT TRES DEREAT. MET N'EO KET NI, A ZO O SEVEL ANEZH, A VEZ SERVIJET DA GENTAN, KRED ACHANON!

SELL: AN DRA-SE EO PALEZ NEVEZ AN "AOTROU" LOMBARD, PREZIDANT AR GAMBR GENWERZH!

Ni a zo milieroù achanomp o venañ er barakenoù-se. N'omp ket fall...



DA LENN

AL LABOUS HAG AR PEZH AOUR
gant François Vincent
embannet gant Sav-Heol / 21,5x23,2 / 9€

Ur gontadenn etrebroadel eo a gaver e pep lec'h, evel amañ e Tunizia. Troet en deus Mark Kerrain ar skrid e brezhoneg ha deuet eo brav gantañ. Sklaer, modern ha simpl eo tresadennoù Cécile Hudrisier. Gant ar roue ur pezh mell penn ront. Gant e warded ur goaf evit tri. Bez' emaoamp e bed al lutresadennoù. A-dal dezho ul labous bihan, koantik, a vez lakaet da c'houzañv met eñ an hini eo a c'hounez bewech ha dreist-holl er fin. C'hoariet e vez kalz a-hed al levr. Plijadur o deus bet ar maketenner hag an treser, sur. A-wechoù e vez gwelet penn ar roue a-dost-tre. Ar skeudennoù taolet war ar paper a seblant kaout fiñv enno... Ha buan-tre e tommer ouzh al labousig bihan, a gan en ur yezh a vez komprenet gant an holl, skeudennaouet brav e doare partitionoù. N'eus ket kalz a skrid, kinniget e meur a liv hag e meur a vent. Aes e vo d'an holl vugale ha d'o zud heuliañ, dreist-holl pa ouzer e c'hellont lenn e-ser selaou.

GERIOÙ-KROAZ

k592 (Etre) gant J.-F. Peden

	I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX
1									
2					■				
3	■							■	
4				■		■			
5									
6									■
7			■						
8			■				■		■
9	■								
10					■				
11							■		

A-BLAEN:

- 1. Da voueta ar chatal, ar c'honikled (gwechall...) (daou c'her 6/3).
- 2. Dont a ra pa vez kavet hir an amzer. Glaourenne.
- 3. Nepell diouzh Muzilheg.
- 4. Porzh-houarn. Trouz ur stokadenn.
- 5. Aneval a sach kirri, binvioù labour-douar... (daou c'her 4/5).
- 6. D'an ampoent-se.
- 7. Germell amstrizh. Lakae traoù an eil re war ar re all.
- 8. Ger japanat evit sioul, seder. Eo, warc'hoazh, kemmet hag eilpennet.
- 9. Klaske gour.
- 10. Moneiz e Frañs, Alamagn hag all. An Tourz pe ar Saezhetaer, pe unan all.
- 11. Tamouez bras e douloù. Gwinizh eilpennet.

A-SONN:

- I. Klasker aour, glaou hag all.
- II. Araogenn ha ger-mell mesket. Gwir da vleinañ, da chaseal ... Dozvet eo.
- III. Pradañ ar reer, war al loar! Louzoù frondus.
- IV. Mailhoni war un dachenn bennak. Ne vern piv. Den a zo arouez ar gozhni.
- V. Un den a zo gag.
- VI. Rakger gresiat a dalv "nevez". N'eo ket blevek!
- VII. Un dra bennak, stumm ur c'helc'h. Bro an All Blacks, berraet.
- VIII. Ger-mell amstrizh. Legumaj askol.
- IX. Impalaer bizantat met ivez prederourien c'hresian an Henamzer. Spered un den.

A LINENN DA LINENN

Loc'hit eus KANT
Savit ur ger all da bep linenn,
o cheñch ul lizherenn hepken
Hag echuit gant MONE

K	A	N	T
M	O	N	E

Diskoulmoù

E	N	O	W
I	N	O	W
I	N	O	W
K	E	N	E
K	A	N	T

E	O	T	E	O	R
N	O	Z	Y	O	R
E	V	N	O	G	N
N	A	O	N	E	Z
E	N	R	E	B	U
I	N	Y	E	R	E
O	V	L	E	S	O
N	N	O	B	W	N
N	N	O	E	O	N
Z	R	N	O	H	T

SKINWEL

SINEMA

Jean-Claude Le Ruyet



BALI BREIZH - d'ar Sul 14 a viz C'hwevrer da 10e10


Bali Breizh ebet gant ma vo ar c'hampionad ski.

D'ar Sadorn 13 e vo skignet programmoù evit ar vugale evel boaz : Kornil ha Bernez da 9e45 ha Na Petra 'ta da heul, da 10e10. An taol-mañ e vo lakaet ar gaoz war un teknik sinema : ar stop motion. Evit en ober ez a Tududa da weladenniñ an ti-produiñ, JPL Films e Roazhon.



AR SARTIGLIA, MEURLARJEZ E SARDINIA

Emañ kêr Oristano war aodoù kornôg enez Sardinia. Ur gêr vihan a zo brudet evit ar Sartiglia, un tournamant gant kezeg da vare Meurlarjez. Ur filmig 13 munutenn, sevenet gant Mikael Baudu



ABILDED AN DROUIDED

Ur film damistorel
YalFilm



REKIPEOÙ

Timothée Messenger

ED-DU PEILHET¹, LEGUMAJ HA FOURMAJ PE SOJA

Dre ar meuz-se e vez tañvaet an ed-du en ur mod all. Estreget krampouezh a c'heller ober diwar ar greun-se ! Ed-du peilhet a vez debret kentoc'h e Bro-Rusia. Du-hont e vez krazet ar greun kement ha reiñ muioc'h a vlaz dezho. "Kasha" a vez graet deus se ha liv rous o devez. Hiziv an deiz e kaver ed-du peilhet pe "kasha" er stalioù a werzh greun a-drak². Met er meuz a ginnigan amañ dindan ne vez graet nemet gant ed-du peilhet ha sklaeroc'h eo o liv. Ha na rit ket biloù, ed-du peilhet a vez produet er vro ivez, sellit ouzh an dikedenn a-raok prenañ anezhañ kar a-wechoù e vez ed-du peilhet emporzhiet deus broioù pell.



o chom e foñs ar gastelodenn, tañvait un tamm da welet penaos emañ kont, ma zo ezhomm poazhañ anezho un pennadig c'hoazh pe chom a-sav. Ma kavit ez eo mat evel-se, tennit diwar an tan ha goloit ar gastelodenn, laoskit evel-se 10 munutenn hep dizoleiñ. Ma ne rit ket an dra-se ne vez ket c'hwezhet a-walc'h an ed-du peilhet.

3 – Gwalc'hit ha troc'hit a dammoù bihan ar pour hag an delioù. Klasket e vez tennañ o mad deus al legumaj, ar gwellañ ma c'heller, hep foeltrañ lodennoù 'zo a vez dilezet gant an dud peurvuiañ (glaz ar pour, lost an delioù pinochez..).

4 – Poazhit al legumaj asambles en ur gastelodenn a-zere (na re vihan na re vras), lakait ur meudad holen gros. Poazhit kreñv da gentañ ha goustadikoc'h war-lerc'h, pa vez koazhet al legumaj. D'ar poent-se e c'heller goleiñ ar gastelodenn ha laoskel 10 munutenn c'hoazh. Pa vez tost poazhet, lakait al loaiedoù koaven - pe yod alamandez - ha meskit mat, da unvaniñ an holl draoù-se.

5 – Troc'hit ar fourmaj - pe an tempeh pe an tofu - a dammoù tanav. Ar fourmaj n'eus ket ezhomm ober seurt ebet a-raok enforiñ met evit ar pezh a sell ouzh an

tofu peotramant an tempeh, e ranker lakaat anezho da rouzañ en ur bilig-lostek gant eoul olivez a-raok, kement ha reiñ blaz dezho. Fritit war an eil tu hag egile ha pa vez krog da rouzañ mat, e c'haller lakaat un dakenn chaous tamari e fin ar poazhadur. Se a ro blaz mat met arabat lakaat ar chaousse e-kreiz ar poazhadur ; a hend-all e chom peg an traoù war ar billig.

6 – Lakait ho forn da raktommañ da 180° ha poent eo sevel ar meuz !

7 – E penn kentañ e vez lakaet ur gwiskad legumaj e foñs ar plad. A-us e vo ur gwiskad ed-du, a-us c'hoazh ur gwiskad legumaj hag ur gwiskad diwezhañ ed-du, ha da echuiñ, war-benn, lakait ar fourmaj, pe tempeh pe tofu, evit ar re na zebront ket formaj.

8 – Enforiñ e vez e-pad 10 munutenn, pe war-dro, da grazañ war c'horre.

9 – Servijit ar meuz-se pa vez tomm gant ur meskaj saladenn, greun diwanet ha krizaj⁶ a bep seurt. Livioù kaer en asiedad a ro plijadur d'an daoulagad !

¹ed-du peilhet (distaget "etu" pe "itu") = sarrasin décortiqué
²a-drak = en vrac
³toma = tomme
⁴tofu = doare formaj graet diwar laezh soja
⁵tempeh = doare kig graet diwar fav soj
⁶krizaj = crudités

Tud dreist-ordinel e oa an drouided. Goude hir-studioù e oant gouest d'ober traoù dibosubl dimp hiziw. Da skwer e oant kapabl da anavoud kleñved un den bennag dre selled hebkén douzh ar moged a save diwar chiminal e di. Trawalc'h d'an drouid bale er gêriadenn evid gouied piw en doa tapet ar vosenn-58 ha lâred dezhañ chomel kufuniet e korn e dan. Kuit a zispign miliardoù a sertersou priziuz evid testañ. Mez kit d'ober ar memez tra hiziw, pa ne weler ket mui chiminal ebet é tivogediñ ! Klevet em eus komz ag un drouid, nawazh, ezel d'ar Gorsez nevez, hag a vehe é klask ober hañval... diwar moged an otoioù ! Chañs vad dezhañ !

Troioù kàer an drouided n'o doa ket moull ebet. Gouest e oant da anavoud an amzer dremenet hag an amzer da zoned. Gouied a raent ive sarmoniñ ar pennoù dizonest, dre gomz pe dre ganal hebkén. Rag kanal a raent aez a-walc'h, gant barzhonegoù savet gante war ar prim, ken aez ha ken buan ha ma veze lipet un tasad gwin ruz gant Bouch Pip : glouk !

An drouided, avad, ne veze ket lonket ar c'homzoù kàer-se gante, mez diveget braw, ya. Komzoù hud hag a c'helle lakaad speredoù ar re tort o eneioù da gaouliñ goude diw pe teir frazenn lemm, a pa vehent bet priñsed pe roueed. Ha da-heul eh ae korfoù ar re-se da voned da gozh traoù, kigoù mogedet a chome da sec'hañ war ur framm eskern hag a rae klik-klik ha kluk-kluk en avel. Meur a fall roue a oa bet tapet evel-se, hag a grede e oa an amzer da zoned evite da virvikén, hag o doa dizoloet en un taol ne oa ar soñj-se nemed touell.

Kuzulierion respetet ha doujet gant ar roueed e oa an drouided. Ha nebtu ne gomze ar roueed en o raog. Alioù mad a ouient roiñ, zokén

war tachenn ar brezeloù. Da skwer, pa oa daet ar Romaned er vro, ne oa ket chomet ar C'halianed da kousked. Re a-gostez Darioritom (Gwened hiziw), da lâred eo Venetiz, da-heul kuzulioù o drouided, a raas un taol-kàer. Un deiz ma oa sañset d'ur lejon a-bezh tremen dre goad Kamorz (Karaez), e oa bet ijin et ur pej gante. An noz e-raog tremen ar lejon dre ar c'hoad, e oa waet ur maread anezhe, peb a heskenn gante, da droc'hañ a-rez douar toud ar gwez hed-ha-hed an hent, war un daou gilometr bennag ha war ur c'hant metr bennag a beb tu. Gwez faou e oant oll. Mez lakaet o doa ar gwez troc'het da chomel en o sav. "Nebaon ! o doa lâret an drouided, ne vo ket avel e-pad an noz-se !" Goude-se enta e oa chomet kuzhet Venetiz er c'hoad, hag a-linenn, lec'h ma o doa laosket ar gwez heb boud troc'het. An deiz war-lerc'h, pa oa ar soudarded roman é tibunañ er c'hoad, e oa bet poulzet war ar gwez, hag evel un c'hoari domino, a wezenn da wezenn e oant kouezhet ponner war an arme roman hed-ha-hed an daou gilometr, ha distrujet toud e oa bet (un dro-gàer he doa maget spered Uder goude, mez afer Uder zo daet pell war-lerc'h).

"Petra ober gant ar faouenned diskaret ? a oa bet goulennet gant an drouided goude (en amzer-se ne veze ket kollet netra). Hag ar re-se d'en em soñjal e-pad tri deiz teir noz. Neuze, goude d'an drouid-meur boud troc'het ur bod uhelvar gant e falz aour, e lâras kement-mañ : "N'o po ket 'med ober botoù-koad !" Ha setu savet staliou botaoier-koad e Kamorz. Ha chomet béw ar c'hustum-se beteg nevez so : diwezhañ botaoier-koad Breizh en deus serret e stal e Kamorz fin 2020.

Piw a grog gant ar vicher endro ? Rag botoù-koad a gerzh !

Gant al lennerien

GLAD SKIANT AR MAEZIOÙ

Un danvez-lezenn a oa bet kinniget gant ar gannaded Pierre Morel-A. L' Huissier eus departamant Lozère gant ar pal gwareziñ glad skiant ar maezioù e Bro-C'hall. Degemeret eo bet gant Breujoù ar vro. Echu e vo bremañ gant ar prosezadurioù a-zivout an tabutoù staget ouzh nozadurioù a denn d'ar skouarn ha d'ar fri, a c'heller kavout en diavaez ar c'hêrioù. E-pad ur mare e oa kaoz kalz eus ar c'hog Maurice, e enezenn Oleron, a gane re abred diouzh ar mintin evit lod zo. Laouen e vo Maurice

bremañ rak kollet en deus an amezeg dirak al lez-varn a oa o tougen klemm. Diwar-vremañ e c'hello ar saout lakaat o c'hloc'higoù da stirlinkat hep ma ne vefe galvet ar saver chatal da vont betek an archerdi. Ar c'hleier a c'hello brallañ abred, ar gleskered koagal, ar grilhed-gwez kanañ hep na c'houlennfe un tourist pe un amezeg nevez-deuet er vro e vefe roet louzeier evit ma paouezfe al loened-se d'ober re a drouz. Hiviziken eo difennet klemm diwar c'hwezhoù kaoch kezeg war an hentoù pe diwar hanvouez.

10 000 prosez a zo bet savet e-kerzh an dek vloaz diwezhañ gant tud deuet d'en em staliañ nevez zo war ar maez. Bremañ, gant al lezenn-se, e ranko pep pastell-vro lakaat war ar roll an trouzoù, ar c'hwezhoù... dezhi hec'h-unan. Ar renabl-se a c'hello bezañ kenstaget ouzh teulioù-gwerzh un ti evit reiñ da c'houzout d'ar prener a-raok na vefe sinet gantañ. Ret e vo da hemañ, war-lerc'h, gouzañv ar pezh en em gavo tro-dro dezhañ ha plegañ ouzh gizioù-bevañ ar vro.

JK

PETRA A SOÑJIT ?

Un nebeud kemmoù a zo bet e Ya ! er sizhunioù diwezhañ – bruderezh, pajenn 2 – c'hoari "A linenn da linenn" e plas Sudoku, pajenn 6 – fent ha programm TV krennet, pajenn 7 – QR Code ha servij lenn,

pajenn 10 – skeudennoù Instagram, pajenn 12. Merzet ho peus sur a-walc'h ez eus ul lec'hienn nevez-flamm o tiskouez ar gazetenn er bed niverel. Mat e vefe kaout ho ali.

AMAZON

Komzet e vez kalz eus Amazon. Kement ma zo bet soñjet reiñ ar gaoz d'al lennerien : a-du, a-enep ? Laouen e vefemp da ouestlañ

ur bajennad a-bezh (9000 sin) da seurt kudenn. Ha gouest oc'h da gas deomp ho soñj ? yf.kvb@orange.fr

REDET PE DIREDET, AR REDADEG A VO E 2021

Diwan hag ar raktresoù* evit ar brezhoneg o deus ezhomm e vefe gwerzhet kmoù Redadeg 2020. Tost an hanter eus an 2020 km a zo bet gwerzhet pe miret ! Chom a ra koulskoude re a boentoù gwer (kmoù dieub), ezhomm zo da lakaat anezho e mouk (kmoù prenet) bremañ ! Ur prantad iskis ha start-tre hon eus bevet e 2020, emichañs e vo sklaeroc'h an hent e 2021 evit an holl

met n'eo ket sur c'hoazh ! Koulskoude, abadennoù ha darvoudoù a vo da lakaat war-wel evit diskouez emañ bev ha yalc'h hor sevenadur hag hor yezh deomp-ni. Mod pe vod e vo eus ar Redadeg e 2021, redet da vat war an hent pe en ur mod niverel ha skeudennet, n'omp ket evit lâra na resisaat hiziv met Redadeg 2020 ne vo ket daleet en-dro hag ar brezhoneg a vo klevet ivez e pep lec'h. Un difi eo

c'hoazh met gant an holl dud, familhoù, embregerezhioù ha kevredigezhioù tomm ouzh ar yezh e vo posupl kas an darvoud-mañ da benn.

*Adkavit ar raktresoù arc'hantaouet e 2020 war hon lec'hienn internet : [https://www.ar-redadeg.bzh/br/ raktresou-arc-hantet/](https://www.ar-redadeg.bzh/br/raktresou-arc-hantet/) Evit kemer perzh en ur bremañ ur c'hm : <https://stalar-redadeg.bzh/> Darempred : www.ar-redadeg.bzh Kehentiñ : Cyril Lelong, 06 13 30 19 49 cyril@ar-redadeg.bzh

AR C'HLASKER AOUR

Daleet eo bet betek miz Mae da "Ar c'hasker aour" gant bodad lenn Kemper gouestlet Loeiz Gwilhou.

Gant Drig

BA'N AVEL EO AET KUIT MICHEL LE BRIS



DIWAN GWENGAMP

Kenderc'hel a ra Kuzul Skoazell Diwan Gwengamp da ginnig obererezhioù. Gant ar mareoù diaes e liesaomp hon doareoù d'ober. Ar wech-mañ e kinnigomp

deoc'h da dizoloiñ marc'had bio Pabu (22) en ur c'hourc'hemenn peadra d'aozañ pitif ar vakañsoù da gerc'hat war stand "Le chant des Armoricaïnes" d'ar Gwener 19 a viz C'hwevrer

etre 4 eur ha 6 eur goude merenn : sistr, chug avaloù, boestoù fourmaj-kig a bep seurt, bara. Mirit ho panerad en ur bellgomz d'ar: 06.75.07.92.32 (a-raok an 12/02)

STAJ STUMDI

Plasoù a chom c'hoazh evit ar staj "Bezañ en e vleud dre skrid" kinniget gant Stumdi. Ur staj evit an holl vrezhonegerien a ra gant ar brezhoneg en o labour pe er gêr.

dre gomz ! Poelladennoù a bep seurt a vo kinniget dezho e-pad 3 devezh evit adwelet reolennoù yezhadur haskritur: kemmadurioù, poentadur, ereadur, distagadur... Kinniget e vo ar staj-mañ e-pad ar vakañsoù-skol, d'an 3-4-5 a viz Meurzh 2021 e Landerne (termen evit lakaat hoc'h anv : 12/02/2021). Prantad

all : Miz Here 2021. Priz : 525€. Arc'hantaouiñ posupl (eurvezhoù CPF...) + Cheñch a ra ar priz hervez statud an den (stajiad-ez bet, den dilabour, studier-ez, koupladoù...) : deuit e darempred ganeomp. Muioc'h a ditouroù : www.stumdi.bzh

SKOL DIWAN LOUANEG ZO O KLASK

Emañ AEP Diwan Louaneg o tuta ur skoazeller (-erezh) divyezhek galleg/brezhoneg a labourou er skol-vamm.

diwall ar vugale war ar porzh ha kempenn ar c'hlas.

Tachenn : Ret e vo dezhañ pe dezhi sikour ar skolaer d'ober war-dro an diwallerezh eus ar beure, ambroug ar vugale betek ar gantinnenn (paeet e vo ar pred dezhañ pe dezhi),

Doare den : Dre ma vez skoliataet ar vugale e brezhoneg e vo goulennet digantañ pe diganti bezañ barrek war ar yezh, d'an nebeutañ dre gomz. Bezañ heuliet ur stummadur "kentañ sikour" a vo degemeret

mat. Degemeret eo an deraouidi ivez.

Kevrat : Darnamzer, 22,5 eurvezh bep sizhun (Kevrat tremenet he fad (CUI-CAE) adalek ar 1^{añ} a viz Meurzh 2021

Darempred : Kas ur CV hag ul lizher emginnig da aep.louaneg@diwan.bzh

Evit mont da selaou ar pennadoù e-lec'h m'ho peus gwelet an arouez



e c'hellit skanniñ ar "QR code" pe mont war-eeun war : ya-kazetenn.bzh



Ya !, Sizhunieg Journal hebdomadaire N° 818 du Vendredi 12 février 2021
1,5 € an niverenn / le n° 80 € ar bloaz / l'année
N° CPPAP : 0622 C 86790
Embannet gant / édité par :
Keit Vimp Bev, 29520 LAZ
02 98 26 87 12
Renner embann / Dir. publication :
Y-F. Jacq, yf.kvb@orange.fr
Kenurzhier / Coordinateur :
Y-F. Jacq, yf.kvb@orange.fr

Maketenniñ / Mise en page :
N. Gourvenec, nicolas.kvb@orange.fr
Koumanantoù / Abonnements :
M. Gallais, keit-vimp-bev@wanadoo.fr
Moulet gant / Impression :
Le Télégramme, 7 voie d'Accès au Port, BP 67243 - 29 672 MONTRoulez/MORLAIX Cedex
Ar pennadoù sinet ne engouest-lont nemet kiriegezh ar re o deus o skrivet.

HOLL DINDAN AR MEMES TOENN

Abaoe 2 vloaz e oa Virginie Le Goazcoz oc'h injinañ ul lec'h bras da vodañ ennañ meur a zen, c'hoant ganto kenlabourat. Ha kavet ul lec'h, dalc'het betek-henn gant menuzerien, ha savet ur gevredigezh, "La Machinerie".

Lochennoù e koad a vo savet da zegemer artizaned. Roet o deus lañs d'ur c'hask arc'hantaouiñ war Kengo ha tizhet dija, eizhteiz zo, 7300€ war an 10 000 a c'hoantaent kaout.

kozhañ hag arrebeuri kozh. Damien Vellery-Radot, eus e du, a roio buhez d'ur stal fab-lab, dre implij an niverel hag e voullerezhioù 3D.

Plas a vo gouestlet ivez da ziskouez krouidigezhioù, e koad pe e danvez.

Nerzh sachañ

Raktresoù e-leizh a zo ganto. Ha deuet int a-benn da sachañ tud d'o heul. Yannick Roussel a zalc'he betek-henn ur preti e Baden. Met ranket en deus serriñ. Eno e vo gant e food-truck, dirak an egorenn, eus 9 eur mintin da 7 eur noz, o kinnig pladoù d'an dud da gas ganto d'ar gêr. Bez' e vo ivez Marion Deguine, merourez Ty Wood, a sav arrebeuri gant koad adimplijet. Hag ivez, evel-just Audrey Le Vigouroux gant he stal dilhad

Bodañ

Dindan ar memes toenn e vo degemeret ivez tud a zo o klask ul lec'h serret – 3 flas a vo – pe reoù digor – un dek bennak ouzhpenn – dedennet ma 'z int gant ar co-working. "Kalz goulennoù a zo. Tost an holl blasoù a zo dalc'het dija." eme Virginie Le Goazcoz, a vo merourez al lec'h. Dezhi e vo da gas da benn ar prantadoù buheziñ, abadennoù sonerezh, abadennoù evit ar vugale...



"Cheñch a raio din eus ma micher grafourez." emezi. Evit poent emaint da vat gant ar labourioù, laouen da welet int heuliet gant an dud – 800 heulier war Facebook, 230 war

Instagram – met ivez gant an ti-kêr hag ar Rannvro. Da 30 000€ e savo an dispignoù, 20 000 evit al labourioù, 10 000 evit ar binvioù. War an hent mat emañ raktres "La Machinerie".

LABEL "PORZH-MOR DILASTEZ" EVIT DAHOUEÑ

Un toullad porzhioù-mor a zo e bae Sant-Brieg : Al Lege, e genoù ar Gouëd ; Binig ha Sant-Ke er gwalarn ; Dahouëd hag Erge-ar-Mor er biz. Porzh Dahouëd, daoust d'ar bihan ma 'z eo, a zo bet, gwechall, ur porzh a-bouez evit ar goeletinier a yae da vaorueta d'an Douar-Nevez ha d'an Island. Bremañ ez eo ur porzh-pesketa hag ur porzhabageal, bettapet gantañ nevez zo an testeniekadur "porzh dilastez".



Stadañ ha krouiñ

Da gentañ ez eus bet graet un diagnostik pervezh eus an endro : ar porzh gant

e gaeoù, an tiez-annez, ar chanterioù, an tornaodoù hag an torosennadur tro-war-dro, ar froudoù-mor er bae,

ha kement zo... Da c'houde ez eus bet bet krouet binvioù padus gouest da stourm ouzh ar saotradur a vez degaset ingal gant kempennadur ha mont-en-dro ar bagoù : eoulioù skarzha ha dourennoù lous a bep seurt.

Pouezañ a zo bet graet war bevezerezh ar bagoù ha prederiañ war implij ar produioù kempenn ha naetaat a ra an dud ganto.

Mirout ouzh ar saotradur

Ret eo bet ivez prederiañ evit gouzout peseurt diarbennoù surentez a vefe da gemer ma teufe ar mor da vezañ saotret dre zarvoud – pe gant ur saotradur o tont eus an

donvor, pe gant ur gwastadur ekologel bennak deuet diwar an douar. Stummañ implijidi ar porzh a zo bet graet ivez, hag evit echuiñ ez eus bet kaset da benn oberoù kizidikaat evit an dud a zarempred ar porzh ordin : annezidi, pesketaerien, touristed, baleanterien.

E gwirionez ez eo an testeniekadur-se disoc'h ul labour hag a zo bet boulc'het pell zo bremañ gant ar pennadurezhioù. Roet e vez al label evit tri bloaz hepken, ha bep tri bloaz e vez adstudiet. Ur skouer vat e bae Sant-Brieg, hep mar ebet, evit ur porzh bihan dudies hag a zo danvez ur sell ennañ !

HG

Kalz labour a zo bet evit tapout al label-se, ha strivoù a zo bet graet, war meur a dachenn, bloavezhioù-pad. O dastum a c'haller amañ, gant pemp ahel pennañ.

gant Ildut

AL LIORZH MARZHUS

FLAMBOEZ

Ar poent mat eo d'ober war-dro ar brousgwez frouezh : flamboez, kastrilhez, spezad... Evit ar flamboez eo simpl-kenañ ar c'hempenn, hervez ma 'zint **advouter** pe ma n'int ket : evit ar ret labourat e-pad ar goañv, evit ar gouennoù all eo ret troc'hañ berr ar c'horzennoù kozh goude m'o defe taolet frouezh e dibenn an hañv.

– Flamboez advouter : daou seurt korz diforc'het mat a weler : lod a liv gwenn ha disec'het mat, bet o teurel frouezh ar bloavezh kent, ar re all, bev anezho, a liv gell. **Troc'hañ berr** a-rez an douar ar **skourroù disec'het** a liv gwenn. Evit ar c'horzennoù all **troc'hañ ar begoù** bet frouezh outo, etre an 1/3 hag an hanter eus an hirder, ha dreist-holl **mirout ar broñsoù** prest da voutañ. Aes int da welet.

– Degas **kompost pe teil pok** (ur forc'had dre m²) e-pad ar goañv ha, war c'horre, ur gwiskad delioù – pe kolo – da blouzañ ar renkennad, hag un dornad ludu-koad dre m² zoken (kalsiom ha fosfat).

– M'ho peus ur renkennad hir a-walc'h e vo mat **plionenniñ** anezhi a-benn ma chomo plom ar c'horzennoù. Bep 4/5 m plantañ ur groaz pe un T ar brankoù anezhi da 80sm a-us an douar, ledan evel ar pengenn. Astenn ha stagañ un orjalenn a bep tu.

Geriennoù : brousgwez : arbustes ; flamboez advouter : framboisiers remontants ; korzennoù : cannes ; broñsoù : bourgeons ; teil pok : fumier décomposé, bien "fait" ; plionenniñ : palisser



